

TRUBUILHO AR BREZEL

1

Bretoned, a Breiz-Izel me meus ar volonte
D'a lavaret eun dra, dirag ho majeste
Pini zeblant d'in zo broman, gwir voyen.
Da zont den em venji, deus on adversourien.

2

Boe oa deut ar bochet, d'ar govern ar vro.
Memp tremenet, amzer goal divalo
Pere neus ar vro man en entier revinet
Breman me a gred von recompensed.

3

Evit mibien Hitler me bromet, d'ac'h ervat
Int ar veach man, rentet en o gwal stat
Pere oa deut ar vro man evel chass a arraj.
Kavet deus matier decserci ho courag.

4

Kavet deus harp, d'ho venn e kas a lerras o bro
Franç hag he alliane ninket hoas tout maro
Met pa sonjan ha traitourien hag en dud impi.
Ne dalfe ket din nac'h efel d'in konari.

5

Pe oa arruet en dud ze ar franc
Lod deus ar merhet n'eus rentet d'ê reverance
Ha gan d'ê a vale dre ar rue
Kouls oaret ha me bras dessous bras dessus.

6

Lod oute memes enkoat ho bried
Pini' oa tual d'ar orjel barbelet
Evit kavout arhant ha kavet plijadur
Deus bet n'on dollet d'ar viço hudur.

7

Bean oa lod all anvet miliciannet
Hoant ar meus da laret d'ac'h valoc'h vit ar bochet
Pere deus goerzet crochen camarado
Evit kaout paper sonjal kavout mado

8

Setu aman ho recit deus malheuriou ar vro
Kometed gand ha bochet ha traitourien ar vro
Oll oamb bed spouronnet ar klevet a kêlo.
Bars ar Parous Plougonver oa kavet seiz korf maro.

9

Pere oa digaset enon gand an auto
Lec'h deus bed souffret tol spontus ar maro
Trist ha kallet oa piou n'a klevet ar tennou
Ken trist all oa hoas goêlet ho c'horfo.

10

Kri oa va galon daoulagad n'a welé
Goêled lakaat seiz den yaoank ebars ar memes be
Heb n'a oa n'a tad n'a mam n'a breur n'a var
Vit ho assitan ar voned d'an douar.

11

Setu aze kristennien o recit deus ho malheur
Cometet gand ar traitourien ha gand mibien Hitler
Pe peus quélou maleurus, horrubl, ha violant
O Doue hon c'hrouer n'a pebes nec'hamant.

12

Evit breman certen n'a nivon ken rêson
Neus ken nemed ober d'ê en exécution.
Anfin kouls ê de abred evel ziveat
Perissa rankout ze ouzer ervat.

13

Pa sonjan em spered pegemet a grimou
Pegen lies a vuntren ha valeuriou
Zo kometed gand traitourien ha Franç
E fraill ma c'halon paour em kreiz gand a vengeance.

14

Digand ar barnerien broman he c'houlenan
Rei d'ê bob ha gollier caneb vit ho recompansan
Da ober bars he penn spes a lagaden
Vit m'a paefon ho krimou dioar goust ho krohen.

15

Vit ho distrujet ha dud inhuman ha barbar
A laquat d'a vreinan e calon an douar
Sêtu aze broman o fortun o bonheur
A scul zo ret dei zotan pa ve arru an eur.

16

Ha dre graç Doue koll e mibien Hitler
Ret a vo dê renonç d'ho lezen brezeller.
Deus ket bed a graç da vean trionfant
Pere niva sonjet commandi an Europe antierramant,

17

Ha breman ma Doue selaouit va feden
Oui hag pa delivret Jonas deuz gof a balen
Va zellet gand true va zalver me o ped
Dimeus ha re zo bepred etre daouarn ar bochet.

18

Graç dê dont d'a barados dom oll kamarado
Pere deus souillet o goad vit Franç hag ar vro
Graç d'emp d'en em welet assambles o repos
Goude fin hon bue en gloar ar Barados.